

813.5.011



Віронія Анна Могочі



© 1911 by the University of Chicago Press
LITHOGRAPHED IN U.S.A.

INDULJANSOU

MAH-VREURIEZ ITRON-VARIA ANN ARMEOU

Induljansou plener

1. An d'ez-mañ euz d'ar Vreurez

2. D'ar honell-ann Itron-Varia evit zifous mañtrez ar Vame-Vreurez (23 mañ)

3. An d' honell-Sant Mikael, en honell d'he c'hoñg

4. D'ar honell-Santellez Ann-Annonsiasant ar Yeoul
Bask, Euz d'he 1903, en honell d'ar honell-Santellez Ann-Annonsiasant ar Yeoul

5. An d'he 1903 en honell d'ar honell-Santellez Ann-Annonsiasant ar Yeoul

6. An d'he 1903 en honell d'ar honell-Santellez Ann-Annonsiasant ar Yeoul

7. An d'he 1903 en honell d'ar honell-Santellez Ann-Annonsiasant ar Yeoul

8. An d'he 1903 en honell d'ar honell-Santellez Ann-Annonsiasant ar Yeoul

9. An d'he 1903 en honell d'ar honell-Santellez Ann-Annonsiasant ar Yeoul

10. An d'he 1903 en honell d'ar honell-Santellez Ann-Annonsiasant ar Yeoul

ITRON-VARIA ANN ARMEOU



EUR GOMZ ARAOK STAGA D'AL LABOUR

Enn eur vro amezeg d'hon hini, e oué moullat n'ez ket pell, eul levrig a lennet var ann tal anezhan : *Brezell enn Nevez-Amzer a zeu!* D'ar ganaonen ni ro evit diskant : *Itron-Varia ann Armeou*. Hema a rei fiziaz d'heomp enn despet da c'hourdrouzon egile. Abaoue ma teuz Sant Deniz da brezeg ennh, ar Frans a dremen evit rouantelez ar *Yec'hez, regnum Gallias, regnum Mariæ*. Ama e laosthomp eur ionaden ankeniet varzu Mari evit ma teuo da zifen he douarou hag he zoudardet.

« Evit rei nerz hag hardisegez d'eur zoudard n'euz netra par da zouzanz Doue ; ret eo hen deski d'ar paotr yaouank abarz ma'za d'ann arme. » (Jeneral Ber'ant). Neb a zalc'h

Tud yaouank o vont da zoudardet denet gant ho c'herent dirag
Itron-Varia ann Armeou.

pell dioc'h Doue, ne deul ket buan ar gouñt ganthan. Hogen, ar Vreuriezh ma a labour evit ma vezo digemeret Doue gand hon-tud a vrezel.

Daou rum-enebourien heñ deuz ar zoudard darn en em gemer ouz he vuez; darn all a sko var ann ene a gasint da goll ma ne vez harpet ouzho. Horpedennou heñ diouallou diouz maro ar c'horf, ha mui c'hoaz diouz ar c'henteleio difriz ha breñnadurez ar peched. Da viana, hon Tad Santel ar Pab, kalz Eskibien ha beleien ho deuz ar fizianz-ze, hervez m'her guelomp diouz ho c'homsou. Rener eur glouer-di a skriv d'heomp kement ma: « Breuriezh Itron-Varia ann Armeou a zo eunn dra dispar, a dle tremen araog meur a zevosion-all; rak m'eo galvet da barea gouliou hor bro. » « Ya, ya, » a lavar ive eur mignon santel ha guizieg, « breuriezh Itron-Varia ann Armeou a zo kaer ha kant guech kaer. Dreizhi ni a vezo treac'h er c'honta brezell, hag a voalc'ho dismeganz hor c'hollou-tremenet. En em zifreta a ra ann diaoul; mes, ar Verc'hez a lakai he zroad benniget var he c'houzog hag her mougo.

Plijet gant Doue e teufe arc'homsou-ze da wir heb dale!

Holl dud yaouank-Franz, er c'hazarniou, a zo o teski beza difeiz hag ober bucz fall. « Var ann traou-ze, » e me Arc'heskob Roazon, ar C'hardinal Saint-Marc, « n'euz ket eur skol goasoc'h eget hounezh. » Ar pezh a reomp evit ar zoudardet, zo o klask miret ouz ann droug-ze. Ma ne boanier ket enz tu-ze, ann Outrou NN. Eskob Segur a gred eo peurgollét enn arme, ann holl vad great d'ar vicherourien yaouank er c'heariou.

Kris'enien, ma'r karit Doue hag ho pro, c'houi a roi ann dourn d'heomp evit al labour-ma; gortoz a reomp hec'h aluzen hag ho peden.

J. GUEUSSET,

Rener Mam-Vreuriezh Itron-Varia ann Armeou.



M.

a zo bet digemeret e Mam-Vreuriezh Itron-Varia ann Armeou d'a 189.

Reizou Mam-Vreuriezh Itron-Varia ann Armeou, savet e Versailles, dre eul lizer aberezh hon Tad Santel ar Pab Leon XIII d'ann 10 a viz genver 1879.

ART. I. — Eunn emgleo a bedennou hag oberou mad, galvet emgleo pe Vreuriezh Itron-Varia ann Armeou, a zo savet, e Versailles, er Chapel a zoug ann hano-ze. Ar Vreuriezh a zo digor d'ann holl gristenien a volentez vad, merc'hed ha goazed, a choantefe en em lakat eunhi.

ART. II. — Ar Vreuriezh a glask, dre skolel gallonduz ar Verchez-Vari, miret ar feiz hag ar vuez vad, hag ho starva c'hoaz etouez ann dud a vrezel.

ART. III. — Evit dont a benn euz al labour-ze ar genreudeur a lavaro bemdez eur *Bater* hag eunn *Ave* gand arc'homsou-ma: Itron-Varia ann Armeou, pedit evidomp;

Eur vanden zoudardet dirag Itron-Varia ann Armeou.

Lakaat a raint ive, enn eur zivuna, ho labourou, ho foan-niou hag oberou mad etre daouarn Doue, ha ma'r gellont e roint aluzen d'hor sikour e kement a reomp evit mad ar zoudardet.

ART. IV. — Evit beza er Vreurez n'euz ken d'ober nemet lakat ann hanv var hor rollou, ha pedi enn intansinou merket. Ar Vreurez zo evit ann holl, me d'eist pep tra, evit ar re ho deuz k'erent enn arme.

ART. V. — Varlerc'h peb oferen; ha beb abardaez e lavrer, e Chapel Itron-Varia ann Armeou, eur *Bater* hag eunn *Ave* evit ar zoudardet, hag evit ar genvreudeur gand ho c'herent ken beo ken maro.

Bemdez ive e vez eunn oferen er memez intansinou, ouz aoter Itron-Varia ann Armeou.

ART. VI. — Superior ann Tadou Eudisted, euz ti Itron-Varia ann Armeou, a zo rener ar Vam-Vreurez. Pa vez ezom; eunn all a ro ann dourn d'hezhan.

ART. VII. — Pardouniou ar Vam-Vreurez a vezo da c'houel ann Itron-Varia vir-zikour (24 mae) ha da c'houel Sant Mikeal Arc'hel.

ART. VIII. — Bep sul, ar genvreudeur en em zastum evit pedi e Chapel Itron-Varia ann Armeou. Kanet e vez litanioù ar Ver'hez, great eur brezegon, ha roet benediksiou ar zakrament.

ART. IX. — Paperioù a gasimp d'ar parrezioù, kouenchon, skolachou ha breuriezoù a c'hoantai en em unani gant Mam-Vreurez Itron-Varia ann Armeou.

Versail, 25 meurzh 1879.


Induljansou Mam-Vreurez Itron-Varia ann Armeou

Induljansou plenier

1° Ann deiz ma vezer digemeret er Vreurez.

2° Da c'houel ann Itron-Varia Vir-zikour, patronez ar Vam-Vreurez.

3° Da c'houel Sant Mikeal, eil patron.



4° Da c'houelioù Nedelek, ann Annonsiasion, ar Yaou-Bask, Hanter-east, Ginivelez ha Konsepsion dinam ar Ver-c'hez.

5° Enn deiz m'ac'h en em zastum ar genvreudeur (eur vech er zizun hebken).

6° Daou zervez er bloaz choazet gant pep kenvreur, var boez ober eur gonfesion jeneral, pe da nebeuta eur gonfesion hirroc'h eget kustum.

7° Kelliez gwech ma reont eur retred pe vision a bemp dervez da nebeuta.

8° Induljansou ann *Daou-ugent heur* evit kement *triduum* a vez great e chapelioù ar Vreurez, var boez tre nen eur pennadig amzer dirag ar zakramant ekspozet, ha pedi enn intansinou merket.

9° Enn deiz ma teu ar rener da velet eur c'henvreur klanv ma'r gell he-ma-kommunia ha lavaret 3 *Bater* ha 3 *Ave* dirag eur grusif.

10° Da heur ar maro.

~~~~~  
Eur vanden vartolodet dirag Itron-Varia ann Armeou.

11<sup>o</sup> Ann holl induljansou a c'hounezer o vizita ar seiz Iliz-Veur e Rom, var boez lavaret 7 *Bater* ha 7 *Ave*.

EVFSAIT. — Ann induljansou all-ma, da Bask, da Bante-host, da c'houel ar Galoun-Zakr, da c'houel Sant Mauris pe unah euz ar pevarzeg deiz varlec'h, hag eur vech bep miz ousspenn, a c'hell beza gounezet gand ar genvredeur a roi aluzen evit mad ar zoudardet, hag a bedo bemdez evit intansionou ann Iliz hag ann Armeou.

Ann holl veleien a c'hounid eunn induljans plenier o lavaret ann oferen, evit eur c'henvreur maro, euz aoter eur Vreureiz staget oc'h Mam-Vreureiz Versailles.

Ar veleien zo er Vreureiz, a c'hounid ive eunn induljans plenier, n'euz forz ouz pe aoter e lavaront ann oferen evit eur c'henvreur maro.

#### Lodennou induljanz


I. Seiz vloaz induljanz heb vech d'ar c'henvreur : 1<sup>o</sup> A bed evit eunn den var he dremenvan pe nevez maro. — 2<sup>o</sup> A glev ofis ann Anaoun. — 3<sup>o</sup> A heul eur c'horf maro d'ar vered. — 4<sup>o</sup> En em gav da bedi gand ar genvredeur pe re all. — 5<sup>o</sup> A glev ann oferen da bemdez. — 6<sup>o</sup> A ra enklask he bec'hejou araug mont da gousket. — 7<sup>o</sup> A ia da velet ar beorien glanv pe ar brizönerien. — 8<sup>o</sup> A labour da unani a re a loa kasouni etrezho.

II. Eunn induljanz a dri c'hant dervez (eur vech bemdez hebken) evit ar c'henvreur a lavar eur *Bater* hag eunn *Ave* gand ar c'homsou-ma : Itron-Varia ann Armeou, pedit evidomp.

III. — Seiz vloaz d'ar veleien a lavar ann oferen, d'ar gristenien a laka he lavaret, ha d'ar zoudardet he c'hlev evit mad spirituel ann Armeou, er chapelion digoret d'ann dud a vrezel.

Ann holl induljansou-ma, plenier hag all, a c'hell talvezout d'ann Anaoun.

† PAUL, Eskob a Versailles.



Itron-Varia ann Armeou. — Penaoz ha pe vare e oue savet ar Vam-Vreureiz. — Peger buan en em skignaz ar c'hiz da bedi evit ar zoudardet.

Er bloaz 1866 eunn nebeud tud a Paris en em glevaz ken etrezho d'ober pedennon evit ann Arme. Emgleo *Itron-Varia ar Zoudardet* a loa savet evit goulenn dre skoazel gallonduz ar Verc'hez, ma c'helje ann dud a Vrezel miret ho feiz gand ho brud-vad, hag en em renevezi er vuez kristen.

Eul labour vraz ha diez great gand eur benveg dister a ziskuez nerz hag ijin ar Micherour. Rak-ze, evit ma vije guelloc'h anavezet dourn Doue, ann emgleo-ma a oue, evit koumanz, nebeud aotale'h a dra. Eur vozad soudardet daslumet enndro d'eur beleg evit en em zlouai dioc'h breinadurez ar c'hazarn, setu ann haden a zeuz heb dale da veza eur vezen ar gaera. O c'houzout pegement e poanier

Adorasion a zigoll great gant soudardet.

evit ober euz hor soudardet yaouank, tud difeiz ha direol, ar gerent hag aleiz a gristenien all en em Jakeaz da bedi ganeomp a greiz kalonn. Dont a reaz ar vrezell, ha var he lerb'h ar réuz vraz e Paris. Eur c'halz euz ar zoudardet o veza neuze dastumet e Versail pe vardro, ann dud a ioa e penn hon emgleo he dougas d'ar gear-ze, hag eno, ann Aoutrou' NN, Eskob Mabil a reaz anezhi eur Vreurie, er bloaz 1874. Pa oue douget al lezen a gase ann holl da zoudardet, tost daou-ugent a Eskibien pe Arc'heskibien a zigemeraz hon emgleo hag a stagaz induljansou outhi. Neuze ar renerien a zonzaz e vije ezom goulenn digant hon Tad Santel ar Pub, kaout ar vadelez da ziazeza e Versail eur Yam-Vreurie evit ar Frans Abez. Mes, ann traou-ze ne vezont ket aotreët buan peurvuia. Aoutrou Persoun Itron-Varia ar Victorien, e Paris, pa c'hoanteaz ober eunn dra evel-se enn he iliz ker brudet, a oue ret d'hezhan trei ha distrei epad pellig amzer. O velet koulz goude e lahouemp da viret ar feiz hag ar furnez etouez zoudardet Frans, Leon XIII ne zaleaz kot da rei d'heomp hor goulenn; hag eul lizer euz ann deg a viz genver 1879 a zave Mam-Vreurie, *Itron-Varia ann Armeou*; ann hano-ze a ioa roet d'hezhi eleac'h hiini : *Itron-Varia ar Zoudardet*, anavezet aziarok. Muioc'h e lenn d'ar pezh a lavar ann Iiz divarbenñ ar Ver-c'hez hag enn doare-ze ar Vreurie a zere euz ann holl dud a Vrezel, divar vor koulz ha divar zouar.

A c'houdevez hon emgleo a bedennou, kavet mad gand ar gristenien, hag embannet e peb leac'h dre ar c'hazetennoù, a zo eat buan var gresk. Evelalo ar prezegennoù great gant rener ar Yam-Vreurie e pevar-ugent klouardi, hag e kalz kouenclou, hag ive ar zikour roet d'hezhan gand ann amiral Gicquel des Touches, a lakeaz c'hoaz mui a diz el labour.

Er bloaz 1879, oamp a veac'h tregont mil a genvreudeur, ha brema ez euz ouspenn kant hanter-kant mil den er Yam-Vreurie. Eunn niver braz a eskibien ho deuz kemennet



pedi evit ann Arme hep sul e prôn ann ofereu bred, enn holl barreziou euz ho eskopti. Ar beden-ze a blij d'ann holl. Euz a hep ti peurvuia en em gav unan bennag enn armeou; evel-se ive eur c'halz a gristenien a zo douget d'en em lakat enn hor Breurie, a ra pedennou evit ho c'herent karet.

### Pegen talvouduz eo ar beden evit ann Arme

Kement a rear evit mad ar zoudardet a zo diazezet var ar beden; a ro sikour d'ann eneo, hag eno ema ar c'henta dalc'h evit pep tra. Arc'hant a zo ezom ive a dra zur; mes fazia kalz a ra neb ne glask, dreist holl, kaout harp digant Doue. Gand ar brasa madou ne raio netra baduz; hag al labour a deui d'ann traon, ma ne vez reizet hervez Doue.

Var sin Jubile Leon XIII, eunn eskob a Frans enn eur gimiada a c'houlenne digant hon Tad Santel, he vennoz

Soudardet e ti ann Omonier.

hag eunn diveza kuzul. O veza en em zonzet eur pennadig, ar Pah a gomsaz evelhen. « Ia ho penniga a ran ; hag evit argentel a c'houlennit diganinn, setu hi ama ; Skignet e peb leac'h ar c'hiz da bedi ; n'euz ken nerz var ann douar nemed ar beden ; neb na bedo ket ne oufe ober labour baduz. »

O kredi kement-ze eo hon euz savet eunn emgleo a bedennou evit ann Arme. Ar beden eo a zigaso ar zoudardet davedhomp. Dreizhi e tizer kaloun Doue, a skuill nenze he c'hras var galoun ar zoudard ; hag hou-ma a boulez ann den yaouank etrezeg ennhomp. Evel-se a zonzemp ; lia guir eo ; rak abaoe, eunn niver kalz brasoc'h a zoudardet a zarempred ann tiez digor t ganeomp evit ho digemeret. Pe hi a zo hardisoc'h da zont daoust ma ve great goab anezho, pe na rear mui kement evit miret na zeufent, ann dra-ze a zo labour ar beden pignet betek Doue.

Mignounet ar c'hâbiten Marceau a lavare d'hezhan eunn deiz : « Ne ouzomp penaoz en em gemerez ; da vartolodet a vez alo kountant ha laouen, n'euz forz peger poanuz e ve ho labour ; eleac'h hon-re ni a vez hepred e kounnar, n'homp ket evit dont abenn anhezho. — Aoutronez, emezhan, setu ama pe zoare en em gemeran ; pa velan va goasod a himor fall, me ia da dremen eunn heur pe ziou dirag ar z'kramant evitho ; ha goude ez a ann traou ean dro evel c'hoari. » Mad, ni a ra kement-all ; pa anavezomp emaoz 'o klask freuza hor labour ; pa glevomp hano euz eur zoudard bennag goal gaset gand ar re all abalamour m'eo kristen, ni ia da zaoulina dirag. Itron-Varia ann Armeou, oc'h he fed'i d'en em glevet gand he Mab 'ken trugarezuz evit lakat urz e kement-ze ; ha raktal ann traou a ia guelloc'h eget biskoaz.

Ar beden evit ann Arme, a zoug ive frouez enn tiegeziou. Re aliez ann tad hag ar vam ne evesaont nemed ouz al loden distera enn ho c'hrouadur ; ne glaskont nemed mad hag eaz he gorf. Pa gemeront ar voazamant da bedi evit



ar zoudardet, e teuont heb dale da daoler mui a ouz evez ann ene haj ar zilvidigez. Ar beden-ze a zalc'h ar zoudard unanet gand he gerent ha gand he barrez. Ann denn yaouank en em gav euruz o c'honzout e talc'her sonj anezhan hag e peder evithan, bebaoz e ti he tad, ha bep sul enn iliz parrez. Neuzo e vez laoueneat, ha kennerzet evit harpa ouz displejaduriou ar c'hazarn, ha chom hepret kristen.

Er skolachou, ar c'hiz da bedi evit ann arme, a zo ive talvouduz meurbed. Ar beden-ze, evel eur jaden dudulz, a zalc'h udanet kalounou ann dud yaouank eat ac'hano da zoudardet ha kalounou ar re zo c'hoaz o studia, da c'hortoz ma vezint ive galvet. Ar rum genta ne c'hellint ket ankoumac'haat ker buan kenteliou ar skolaj kristen ; hag ann eil rum, o sonjal aliez dre he hent e vezo ret tremen, a boanio muioe'h da c'hrizienna douar enn ho c'hiero'hien ar feiz ha doujanz Doue.

Ar merc'hedigou ive er skol, hag al leanezet er c'houen-

Soudardet var ann dachenn Vrezell.

chou, a vezo eunn dra gaer d'hezhho pedi evit ar zoudardet ; rak breudeur pe gerent ho deuz enn arme ; ha pa n'int ket galvet da zifen ar vro, e leont da viana, hervez ho galloud, rei souten d'ann neb a ra al labour-ze, divar goust he iec'hed hag he vuze avechou.

Dre ar beden-ze e teur marteze a benn dagaout adarre evel guehall beleien oc'h heul ar zoudardet. Ouz he c'hlevet e prôn ann oferen-bred da zul er parrezioù, e teuer da gompren pegen douget eo hon tud yaouank er c'hazarn, da goll ho feiz hag ho furnez. Ar gristenien goude a gomz etrezho euz ann dra-ze, ankeniet ma'z int rak m'eo ken diez d'ar zoudardet ober ho deveriou a relijion ; evel-se e teuer a nebeudou, e peb leac'h, da c'hoantast ba da c'houlenn ma vezo roet beleien d'hezhho. Ar mennoz-ze a zo bet meur a vech, er bloavezioù tremenet, diskleriet gant guella kristenien Frans, dastumet ama hag ahount evit klask ann tu d'ober muia vad. Koulzgodé, ar prezegennoù great gant rener ar Vam-Vreurieuz dirag ouspenn eiz mil kloarek, a zo bet ive talvouduz da gement-ze. He vrasa toul oa skigna ar beden evit ann Arme ; mes, poanta a reá, er memez amzer, evit diskuez peger braz ezom a zo da zikour ar zoudardet e peb giz, ha da c'houlenn ma c'hellint, easoc'h eget brems, ober ho deveriou a gristenien.

Ar beden evit ann Arme, her guclet hoc'h euz, a ra kalz vad d'ann eneou. Avechou ive e tigas peadra da rei d'hon tud yaouank eunn tamik eaz ha plijadur evit ar c'horf. O klevet kelou euz hor soudardet, meur a hini a rofo aluzen evitho. Ouspenn-ze, petra bennag ne goust netra lakat ann hano var rollou Ar Vreurieuz, evelato, ar reizou kaved mad gand hon Tad Santel, a lavar d'ar genvreudeur, rei ma'rgellont eunn draik bennag evit harpa ouz ar mizou a gempromp gand ar zoudardet.



Petra a rear e Mam-Vreurieuz Itron-Varia ann Armeou

Bemdez, ouz aoter ar Vreurieuz, e Versail, e lavarer eunn oferen evit holl soudardet Frans beo pe varo, evit ar genvreudeur, evit renerien ha Madoberourien ar breuriezoù pe draou all savet e profit ann Arme.

Da zul ha da c'houeliou ar Vam-Vreurieuz e vez c'hoaz eunn ofiz all da c'huoc'h heur noz enn hor chapel, hag e vez Kanct Litanion ar Ver'hez, lavaret ar pedennou diouz ann noz, embannet ar grasou goulnnet epad ar zizun, great eur brezegeñ ba roet benediksiñ ar zakramant. Avechou e vez lennet ive darn euz al lizeri digaset da rener ar Vreurieuz, hag a zo goest da gresthi fiziañ ar gristenien pe ho anaoudegez-vad hag ho aket da bedi. Eleiz a zoudardet a zou d'ann ofsou-ze a blij kalz d'hezhho. Meur a hini, distro




d'ar gear ho deuz skrivet d'heomp : « Euz kement zo e Versail n'am euz keuz da netra nemet d'ho ti, da chapel Itron-Varia ann Armeou, ha da ofisou ar zul da noz. Oh ! ann ofisou-ze, ma c'heljemp ho c'haout ama ! Bep sul am be souj anezho hag e vezan a spered ennoh ! » Horv pedennou a zo ive heuliet gant tud kear, hag evel-e eo eunn dudi guelel bep sul hor chapel leun a gristenien devod ha parfet.

Bep yaou e vez c'hoaz benedikcion ganeomp. Dar bevare sul euz ar miz, ar zakramant a vez ekspozet azaleg oferen ar zoudardet beteg seiz heur noz. Kera labour hor Breuriez eo ann adorasion-ze great e hano ann arme evit henori Kor Zalver, evit digoll ann dizurasion ker stang er c'hazarniou, hag evit gervel bennoz Doue var ar zoudardet hag ho c'herent. Goude ann oferea eur zoudard a gemer hano ar gamaradet a garfe tremen eur c'hartheur dirag ar zakramant, o verka ar mare ablj da bep hini. Evel-se evez, heb paouez, soudardet oc'h adori Jezuz ; ha n'euz netra da skej ar galoun, evel guelel ann dud yaouank-ze, o tont e hano ann Arme da zaoulina dirag Roue ann Armeou. Piou a lavaro pegement a zoudardet zo het, dre ann adorasion-ze, diar-bennet varzu Doue, dalc'het enn hent mad pe gaset var vell !

Erfin, eur vech er bloaz, da c'houel ar Galoun-Zakr hag enn noz arag e yez eunn adorasion a beder heur Var'ngent, e chapel Itron-Varia ann Armeou.

### Ar fizianz zo e Itron-Varia ann Armeou.

Ne ouj femp ket niveri ar grasou a c'houlenner keiliz ha hemdez digand Itron-Varia ann Armeou, hag ar pedennou-ze a vez peurvuia selaouet. Rak-ze ive ez a bepred ha bjan var greak ann devosion gaer-ze. Ar pez hen diskuez splamm ha sklear eo, al lizeri a zeu a bep bro da rener ar Vam-Vreuriez, ann traou digaset e prof evit seveni eur bromesa



bennag, evel taolennou marbr, ha lampou dale'mad var elum dirag ar Verc'hez, ha mui c'hoaz ar belerined a zired, a dost hag a bell, da zaoulina eharz treid hor patronez gallouduz.

LIZERI. — Heb hean e skriver d'ar rener o c'houlenn pedennou hag oferennoù, pe o lakat goulaou ha lampou dirag ann Itron-Varia. Ne dlefet ket avad gedal respount diganeomp evit ann traou-ze ; eur c'holl amzer eo, hag eur c'holl arc'hant ive. Ha n'euz ket a dro da gaout nec'h ebet. Kement a leverer d'heomp da ober a vezo heuliet penn da benn.

Ar pez a garfemp eo e ve lavaret d'heomp, bep bloaz, ann niver euz ann dud lakeat er breuriezou savet du-ma pe du-hont. O tigas d'heomp eur c'helou bennag euz ho labour, ar renerien a rafe ive eunn d'a talvouduz da c'hloar Itron-Varia ann Armeou, ha goest da skigna muioc'h-mui ann engleo a bedennou.

LAMPOU HA GOULAOU. — Aliez guech. mamou pe c'hoarezet soulardet yaouank a skriv d'heomp evit ma vezo lakeat goulaou pe lampou dirag skouden Itron-Varia ann Armeou. Ar re-ze var elum a zalc'h plas ann dud ne c'hellont ket dont betek ama, hag, o rei gloar d'ar Ver'hez-Vari, a c'houlenn he bennoz evit ar baotred yaouank lakeat evel-se dindan he skoazel garantezuz.

PELERINED. — Kalz tud, hag a bell bro, a zeu da velet Itron-Varia ann Armeou. Puotred yaouank araok mont d'ann Arme a fell d'hezho en em erbedi ouz hor patronez ha kommunia en he japel. Mamou, hag aliez tiadou tud a bez, a zeu da badi evit eur Mab eat pell dioc'h ar gear. Edoug ar bloaz 1889, peder banden zoudardet zo deuet a benn kaer da govez ha da zakramanti e Iliz Itron-Varia ann Armeou. Guellet hon euz ive ofiserien a bep renk. Hogen, daoust hag ann traou-ze holl n'int ket eunn lesteni euz ar fizianz vraz a zo e Itron-Varia ann Armeou ? Ne ziskuezont-hi ket ez a bepred var gresk ann devosion enn he c'henver ?

**Petra d'ober evit mont e Mam-Vreuriezh Itron-Varia ann Armeou, ha gounid ann Induljansou staget outhi gand hon Tad Santel ar Pab.**

De genta lakat ann hano hag al leshano var hor rollou, e Versail, pe var roll eur Vreuriezh savet enn eur barrez bennag a unan gand hon hini. Peurvuia e roer da bep kenvereur eur billet sinet gant rener ar Vreuriezh ; mes n'eo ket ret agrepp kaout ar billet-ze.

D'ann eil, pedi hervez intantionou ar Vam-Vreuriezh da c'houzout eo, evit ma vezo miret ar feiz ar vuez vad hag ar gizioù kristen etouez ar zoudardet, o lavaret bemdez eur Batez hag eunn Ave gand ar c'homsou-ma : Itron-Varia ann Armeou, petit evidomp. Ouspenn-ze, enn eur zivuna, kinnig da zoue labourou, poanioù hag oberou-mad ann



dervez. Eunn dra gaer e ve ive rei aluzen evit hor sikour da zigemeret ar zoudardet.

N'euz pec'hed ebet o chom heb ober unan pe unan euz ann traou-ze.

Alia a rer ann holl gristenien d'en em lakat er Vreuriezh, mes, dreist pep tra, ar re ho deuz bugale pe gerent enn Armeou ; ha plou n'hen defe ket hiviziken ?

Ann dud a zigas d'heomp listennou a bedomp da skriva mad ha sklear ann hanoion ha leshanojou ; o fazia e kenver kement-ze e virfent ouz meur a hini da c'hounid ann induljansou. Den ne die beza lakeat var ar rollou heb gouzout d'hezhan ; rak-ze ne gemerer ket hano ar re varo nag ar vugale n'ema ket c'hoaz ho skiant gantho.

### Madou spirituel ar Vreuriezh.

Ouspenn ann induljansou merkel var golo al levrig-ma, hag a zougo, a dra zhr, ann eneoù kristen d'en em lakat er

Soudardet goullet.


Vreuriezh, kenvreudeur Itron-Varia ann Armeou ho deuz c'hoaz perz enn oferen lavaret bemdez oc'h Aotêr ar Vam-Vreuriezh, e Versail. Varlerc'h ann holl oferennoù, hag er beden dioc'h ann noz, enn hor Chapel, e lavarer ive eur *Bater* hag eunn *Ave* evitho hag ho c'herent ken beo ken maro.

### Penaoz skigna ar beden evit ar zoudardet.

1° Ar c'hiz kaer-ze en em astenno pa vezo brudet gand ar c'hazetennou kristen.

2° Pa vezo prezeget divar he fenn etouez ar glouer, er c'honenchou hag er parrezlou. Diskuezet hon euz dija peger braz vad ara er skolachou, rak ma ten ar baotred ha merc'hed yaouank da labourat evithi, a greiz kaloun, pa gomprenont eo talvouduz d'ann holl. N'euz ket ezom da lavaret ann digemer great d'hezhi er parrezlou. Ar beleg a vezo bepred selaouet pa gomso euz ann devosion-ze. Plijardur vraz a rai d'ann tadou ha Mamou, o pedi hag o lakat pedi evit ho bugale eat pell droc'h ar gear; Breudeur, c'hoarezet ha mignouned ar zoudard karet a vezo ive a du gantha; ia deuet mad e vezo gand ann holl. Anaout a veomp Mistorerien hag ho deuz, e karterion digristen, kavel ann ta da zastum ar bobl enn dro d'ar gador, o prezeg var ar beden evit ann arme. Ar guella tro a outef da gaout evit ar prezegennou-ze, eo ann oferen a lavarer peurvuia e pep parrez evit ann dud Yaouank o vont d'ar zervich. Neuze hi ho unan koulz hag ar gerent, a gavo dudiaz pedi evit ar zoudardet, hag a lakal ho hano var rollou ar Vreuriezh

3° Eunn dra all c'hoaz euz ar quella evit skigna ar c'hiz-santel-ze, eo lenn ha lakat lenn *lizeri Itron-Varia ann Armeou*, a vez digased bep er mare evel lizeri Breuriezh ar feiz, hag a ro keleier euz a gement vad a rear etouez ann dud a Vrezell. Eur skoed ar bloaz a goustont; mes, ma'c'h en em



glev deg pe zaouzeg evit kemeret eul fevrig a lennint ann eil goude egile, ne dai nemet pemp pe c'hezec'h guenneg d'ar bep hini.

4° Ar zoudardet a c'hell ive ober kalz vad d'ar Vreuriezh. Pa skrivont pe pa'z cont ho unan d'ar gear, n'otra easoc'h eget kas eur billet bennag d'ho c'heront ha mignounet, hag evel-ze e reont aleiz a labour e berr amzer, o rei da anaout e seb leac'h hon emgleo a bedennou.

5° Ertin, o lakat enn ilizou eur skeuden euz Itron-Varia ann Armeou, e vezo ive boazet ar gristenien d'he fed'i ha da gaout fiziaz enhi. Arang mont kuit, ha pa zeuint d'ar gear evit eunn nebeud derveziou, ar baotred yaouank a zaoullino drag ann imaj benniget. Epad ma vezint enn arme, ho zad, ho mam, ho breudeur, c'hoarezet hag holl gerent a bedo ann Itron-Varia, bep sul, ha da bemdez avechou. Pa glevint e vezo ar zoudard keaz enn hospital, pe o vont da vrezeklekaat er broiou pell, neuze e tiredint drag

Ann distro d'ar gear.

Itron-Varia ann Armeou, o c'houlen kalonnek, ma tistroi, ann den yaouank beo ha ya'h davetho.

Setu aze petra gav d'heomp a ve mad d'ober evit skigna muioc'h mui, ann devosion da Itron-Varia ann Armeou. Pedit a reomp, enn hano Doue, kement a lenno-al levrig-ma, da boeza hervez ho galloud var eul labour ken falvouduz d'ann eneo. Pa gomsint anezhi, hiniennou a c'heffe lavaret d'hezho : « Adarre eunn devosion nevez ! » N'eo ket nevez flamm, p'he deuz dija pemp bloaz var'nugent. Mes, goude ma vije nevez, perak neve ket digemeret ma'r d'eo mad ? Doue a zigas pep tra d'ho mare. Oc'h klenvejou nevez eo ret kaout louzeier nevez. Pegement a draou n'oa ezom ebet anezho guechall, hag a zaver brema heb sellet oc'h dispign ! Evit skuere, n'oa hano ebet da zigei skolioù kristen, abalamour, kenta a zeske ann holl skolaerien d'ar vugaligoù oa ho c'hreansou hag ho deveriou e Kenver Doue. Ne c'houlennet ket sevel hospitalioù katolik, rak n'oa biskoaz soujet lezel tud koz ha klanvourien da vervel heb ho zakramanchou. N'oa ket ezom ken nebeud da gemeret nec'h gand ar zoudardet, rak be'eien a ioa ouz ho heul, hag euz oa d'hezho beva evel guir gristenien. Brema, siouaz ! ho distroer diouz Doue, hag e roer d'hezho kentelioù var bep droug. Bet eo eta klask ann tu d'ho harpa, ha da zifen ho feiz hag ho brudvad. Evit-ze eo bet savet Breuriez Itron-Varia ann Armeou. Ann digemer great d'hezhi gand ann Eskibien, ann dud a Iliz hag ar gristenien a bep bro, a ziskuez e teu aberz Doue.

### Litanioù Itron-Varia ann Armeou

(Kavet mad gand Aoutrou'n Eskob Versail, hea deuz staget outho 40 dervez Indulj.)

Doue ann Tad, euz ann env, bezet truez ouzomp.  
 Doue ar Mab, salver ar bed, bezet truez ouzomp.  
 Doue ar Spered-Santel, bezet truez ouzomp.  
 Dreindet Santel, eunn Doue hebken, bezet truez ouzomp.



Santez Mari, pedit evidomp.

Santez Mari, Merc'h da Zoue ann Armeou,  
 Itron-Varia ann Armeou, Mam Roue ar Rouaned,  
 Itron-Varia ann Armeou, pried d'ar Spered-Santel, a  
 c'hounnezaz arbed,

Itron-Varia ann Armeou, goulon-deiz ann heol a justiz,  
 Itron-Varia ann Armeou, Mam meurbed kalougeg,  
 Itron-Varia ann Armeou, Kre evel eunn Arme renket var  
 ann dachen,

Itron-Varia ann Armeou, Stereden ar Mor,  
 Itron-Varia ann Armeou, Tour David,  
 Itron-Varia ann Armeou, Moger-difenn ann Iliz,  
 Itron-Varia ann Armeou, Rouanez armeou ann Elez,  
 Itron-Varia ann Armeou, Rouanez ar Frans,  
 Itron-Varia ann Armeou, Rouanez ar Zoudardet,  
 Itron-Varia ann Armeou, Rouanez ar Variolodet,  
 Itron-Varia ann Armeou, hoc'h euz a Viskoaz bruzunet  
 penn ar Zarpant Ifern,

Jann d'Ark, galvet gant Sant Mikeal da zavetei ar Frans.

Itron-Varia ann Armeou, a ro harp d'ar zoudard er Vrezell, ha d'ar martolod er gual amzer,  
 Itron-Varia ann Armeou, a ra ar c'halonou stard ha dis-pount,  
 Itron-Varia ann Armeou, a roaz ar gounid d'ar gristenien er brezelioù,  
 Itron-Varia ann Armeou, a zeu d'hon dional dioc'h peb droug,  
 Itron-Varia ann Armeou, a zistro divar'nhomp ar bonlij hag ar mindrail,  
 Itron-Varia ann Armeou, a ro sikour d'ann dud goullet pe var ho Zremeavann,  
 Itron-Varia ann Armeou, a zalc'h neat kaloun ha korf ar zoudard a c'houlen he skoazel,  
 Itron-Varia ann Armeou, a zigas d'ar porz ar martolod a laka he fizianz ennhoc'h,  
 Itron-Varia ann Armeou, a ro laouennedigez d'hon tiegeziou,  
 Itron-Varia ann Armeou, a zec'h daelou hor mamou hag hor c'hoarezed,  
 Itron-Varia ann Armeou, a zo bet treuzet ho kaloun gand eur c'hleze a c'hlae'char,  
 Itron-Varia ann Armeou, hoc'h euz heuliet hent ar c'halvar heb douja kounnar ann dud,  
 Itron-Varia ann Armeou, a jomaz teir heur ebarz freid ar groaz,  
 Itron-Varia ann Armeou, hoc'h euz digemeret ar goad euz goulloù Jezuz,  
 Evit gloar Jezus-Krist, grit d'heomp gourin kalonneg, ô Itron-Varia ann Armeou.  
 Evit Silvidigez ar Frans, grit ma labourimp, heb damanti, ô Itron-Varia ann Armeou.  
 Dioc'h Maro ann dud digaloun, hon diouallit, ô Itron-Varia ann Armeou.  
 Dioc'h Maro ar bec'herien, hon diaoullit, ô Itron-Varia ann Armeou.

Petit evidomp.



PEDEN

Petit evidomp, ô Itron-Varia ann Armeou, goulennit ma vozimp guir zoudardet da Jezus-Krist hag ive ma c'hellimp, dre ho skoazel galiouduz, gonde beza great erbod-ma hon deverioù e kenver hor bro, kaout digemer er Baradoz, da velet enn he c'hloar, ho mab benniget Hor Zalver Jezus-Krist, roue armeou ann env hag ann douar. Amen.

### Oberou diazezet var ar beden evit ann Arme.

TIEZ DA ZERC'HEL PLAS AR GEAR. — E kalz a gearioù braz ez euz tiez mad digoret evit ar zoudardet. Eno, eur beleg, Omonier heb pae, a zigemer ann dud yaouank evel mignoned, o rei d'hezhô paper, plum ha liou da skriva, levrioù ha c'hoarioù a bep seurt, enn eur ger, peadra da

Varc'hoaz ar gounid denet gand armeou Franz dre c'hras Kaloun Jezuz hag Itron-Varia ann Armeou.

